



Dindan ar c'hloastr e Landreger.

Cliché BLEUN-BRUG.

Bleun-Brug

Ha paet eo ganeoc'h ho koumanant 1952 ?

An darn vrasa eus hon lennerien a zo echu o c'houmanant. O fedt start a reomp eta da baea o c'houmanant nevez raktal, pe da lavaret d'eomp ne gemerint mui ar gelaouenn.

Koumanant bloaz : 500 lur.
Koumanant a enor : 600 lur.
Madoberour : 1.000 lur.

Kas an arc'hant da : V. SEITE, Bleun-Brug, 65, rue Y.-Collet, Brest.
C.C.P. 544.22 Nantes, hag ar skridou da : M. l'abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan (Finistère).

TAOLENN

War-lerc'h an hanv, gant L. B.	1
Pedenn ar Gelted	2
Yann-Ber Kalloc'h, gant S. Richard, O.M.I.	3
Eun tamm istor	6
Bihan me, gant Evnig Penn-ar-C'head	7
Mari-Amis Picard, gant L. Kerbiriou	8
Bro Japon etre daou du, gant Ar reder mor	12
Pinvidigeziou Breiz	14
Korn al liziri	15
Pe oad eo an tamm koad-man, gant K. Riou	16
Gant piou eman ar wirionez ? gant L. B.	



133666

War-lerc'h an hanv

A BAOUE meur a zervez a oa, e welen, en eur zigeri va frenestr, diouz ar mintin, strolladou gwennilied, kluchet war an neud-horjal, tu ha tu d'an hent.


Hi, peurliesad, ken divorfil ha ken lijer, d'an eur-se, a jome eno hanter-sounnet, an eil e kichen eben, tenval o fenn, evel pa vijent bet war c'hed eus eun nevezenti vras bennak.

Hag o titour mont kuit e vefent-hi, dija, a zonjen ennoun va unan ?

Siouaz, ya, rak, er mintin-man, kaer am eus bet sellet a-gleiz hag a-zehou, n'am eus gwelet hini ebet ken.

Aet oant gant o hent, aet da welloc'h bro... Ha n'am eus ket gellet miret da hirvoudi ha da lavaret : gwir eo, eta, eman adarre an hanv oc'h ober e dalarou, hep dale, e vezo evidomp an amzer dremenet ha ne vevo mui ennomp nemet er sonj...

...



Hanv ar bloaz-man, na pegen dispar e vezo bet evidomp, en hor c'hon-nig douar a Vreiz-Izel ! Bennoz d'ezan da veza laouenaet eur wech muloc'h hor c'halanou paour a dud.

Bennoz evit an heol benniget, hag ive ar glao madelezes, o deus maget ha darevet, en eun doare ker klok, trevadou ha frouez an douar !

Puilh eo bet an eost ha dastumet mat eo, a-benn vremen, er grigno-liou. Dre c'hras Doue : « Ne vanko ket c'hoaz bara da vab-den. »

Bennoz evit ar baleadennoù dudi, graet a-dreuz hag a-hed mêziou hag aochou hor bro. Gwella-se, m'hon eus gouezet dizolei ha chom a-sav dirak an holl splanderiou, hadet war hon hent, gant Mestr ha krouer pep tra.

Bennoz evit ar pardonioù, ar re vihan hag ar re vras, evit an holl gouelioù kaer, enor hor bro, ha ne gaver, e nep-lec'h all, o far dre ar bed. Pardonioù ha gouelioù, hag o deus ledet dirak hon daoulagad ten-zorioù hor Feiz ha tenzoriorioù hor Breiz : gened bepred koz ha bepred nevez...

Bennoz erfin evit ar vignoned vat, hon eus gwelet, evit an dud a galon, hon eus darempredet, evit ar bodadegoù, hon eus heuliet, evit ar prezegennoù, hon eus klevet, evit kement tra, en deus roet tro d'eomp da binvidikaat hor spered, da startaat hor menoziou ha da anaout gwelloc'h an hent a dleomp bale warnan.

Pebez koll, e gwirionez, ma n'hon defe dastumet netra en hor c'halon, sanailhet netra en hor penn, ma ne vefemp ket denoc'h hag ampartoc'h evit al labourioù start a zo ouz hor gortoz epad miziou hir ar goanv !

...

Ar goanv eo mare an hada ha pegwir ne eoster nemet diouz ar pezh a vez hadet, da bep hini eo dibab an had mat ha pourchas, evit ar gwella, an douar d'e zigemeret...

E kenver gounit ar bara, koulz hag e kenver ober vad d'ar re all, hon eus kement da zeski, kement da stourm...

Dirak al labour ouz hor gervel adarre, goude eun tammig ehan, savomp en hor sav, tufomp en hon daouarn hag adkrogomp gant hon ero.

Eur c'habiten, e penn e soudarded, en devoa en em gannet epad pell ouz an enebourien, gwech o koll ganto, gwech o c'hounid warnezo. Eun devez, da vihana, e voe roet lamm d'ezan, evel ma n'en devoa ket bet c'hoaz.

Fallgalonet e voe an den, hag ec'h azezas war al letoun, e benn etre e zaouarn, trist maro. Endre m'edo evelse o lonka sonjou, e welas eur verienen a glask dougen war he c'hrugel eur galoenn, dek gwech pounneroc'h egeti. Koueza a eure gant he samm ; sevel a eure adarre, koueza a eure eun eil gwech ; eun eil gwech e savas ; koueza a eure dek gwech, dek gwech e savas, met abarz ar fin e tigouezas gant he samm e beg he c'hrugel.

Ar c'habiten pa welas nerz kalon an aneval bihan-se, a zavas d'e dro en e sav, a zestumas e dud, a zailhas war an enebourien, hag a drec'has anezo.

Er stourmad evit skigna hor menozioù, ne fallgalonomp ket. Abred pe ziwezat, hol labour a zougo frouez.

An ao. Perrot a lavare alies : an neb a venn, hennez a c'hell !

Ra vezo ive hor ger d'eomp-ni.

L. B.

Pedenn ar Gelted

*Aotre Dimp, Doue, da warez,
Ha gant gwarez, nerz,
Ha gant nerz, poell,
Ha gant poell, gouiziegez,
Ha gant gouiziegez, dibab ar gwir,
Ha gant dibab ar gwir, e garout,
Ha gant e garout, karout an holl vuhezioù,
Ha gant an holl vuhezioù, karout Doue,
Doue a bep madelez.*

Prière des Celtes

Accorde-nous, Seigneur, ta protection,
Et dans ta protection, la force,
Et dans la force, la compréhension,
Et dans la compréhension, la science,
Et dans la science, le choix du vrai,
Et dans ce choix, l'amour du vrai,
Et dans cet amour, l'amour de tous les êtres vivants,
Et à travers tous les êtres vivants, l'amour de Toi,
Dieu de toute bonté.

Yann-Ber KALLOC'H

*Lodenn eus prezegenn an Tad Richard, bet graet e Pariz da gefñver devez
Y.-B. Kalloc'h.*

NE vern d'in, an abeg en deus va galvet da sevel er gador-mañ ! Ar pezh a gont, eo levezet eun enezour, bet gwechall pesketaer, karget da veuli Yann-Per Kalloc'h : brudeta hugel Enez-Groe, bet ivez reder-mor, ha barz dispar e Zoue, e Vro hag e Yez.

A) — Buhez Y.-P. Kalloc'h.

I. — Daoust d'eoc'h da anaout mat-tre, danevell-vuhez hor c'henvroad « Bleimor », gouzanvit selaou, koulskoude, an diverra anezi, skrivet gantan e-unan...

« Me 'zo ganet e kreiz ar mor, e bro Arvor. Va zad a ioa evel e dadou, stlejer-rouedou. Va mamm ivez a laboure da c'hounid bara. O deizioù va bugaleaj, p'edon dilui, gant va mamm o redek en irvi ; pe va zad er besketerezh. C'houec'h oamp neuze, Santez Mari, en dro d'an daol. Yac'h ha laouen e vevemp holl. Da Zoue ha d'eoc'h e tougemp bri. Bremañ, n'omp mui nemet tri. Ar maro, ouz an nor en deus stoket. Hon eurvad a zo aet kuit en eun arched, d'ar vered da gousket. Bet oun er c'hloerdi, en arme... Petra lavarinn d'eoc'h, Doue striz, mor a vadelez ? C'houero eo laez ar baourentez. E-harz hoc'h aoter e klaskan dibun va fater. War va daoulin... Komzit, va Mestr : ho mevel ho selaou. Sturier dispar, renit va bag en argol, ha me 'veulo hoc'h ano e mesk ar Vretoned. Ha pa zeuio evidoun ar maro, davedoc'h, ô Barnour, e pignin dibreder. Rak me vezo hennez a gane evit kennerzi ar Feiz e kalon e vreudeur... »

...

II. — E nep lec'h koulz ha dindan pluenn « Bleimor » e-unan, n'em bije kavet komzou da zisplega ken fraez rozera e vuhez, enni, mesk ha mesk : dudi, trubuilh ha klod.

a) Eurur edo, moarvat, ar bugel, dindan mantell e vamm e Kerglavezir, skoulmet gantañ e vizied, o teski karout Doue, ar Werc'hez hag e Vreiz. Laouen edo ar paotrig o redek diare'hen dre an aochou, pe o c'hoari e bagouigoù Porz Tudi. Lirzin edo ar c'hrennard, pa c'hoarveze gand e dad rei dezañ digemer el lestr bras evit mont gant ar rouejou da rastellat strad ar mor doun. Blaz ar mel a darzas e poull e galon, dreist-holl, d'an dervez ma kredas klevout Doue o lavaret flourik dezañ : « Dilez, da vat, Tad, Mamm, Keriadenn, Bag ha rouejou ; deus d'am heul, ha te vezo hiviziken, pesketaer tud ! »

b) Met, heuilh roudou hor Zalver eo boulc'ha hent ar groaz. Hag e-gwirionez, adalek neuze, e kloerdi bihan Ker-Anna, Doue a amboudas e frailh e galon, evel eur genn lemm, troad ar Groaz, ha ne zaleas ket da sanko dounoc'h douna he gwirizioù ha da zougen frouez put ha diniver. An taol morzol kenta, var e galon dener, a roas dezañ kelou beuzidigez e dad. An emzivad kêz ne gavas da luskellat e anken, nemet ar sonj « Beza ar beleg gredus, war sao ouz an Aoter, o kinnig an Aberz ». Siouaz ! Eur c'hleñved kuz a zeuas, neuze, gant e zourn didruez da brenna outañ dor ar c'hloerdi bras. Eun all, marteze awalc'h, en dije mallozet en Neñv. Kalloc'h a voustras war e rann-galon hoc'h hirvoudi seven dirag Doue : « Pegwir eo maro huñvre va yaouankiz, pegwir ho peus taolet samm ho kroaz war va skoaz, bezit benniget d'am beza dibabet, evit stlejal ho Kroaz dre hentchoù ar bed holl... » Evel eur vagig disturiel, setu heñ taolet ha distaolet, du-mañ du-hont, o klaskpenaos gounid eur gweneg bennag da brena bara d'e vamm, ha louzou d'e c'hoar gwall glañv.

Ma ne c'helle ket beza beleg, e c'helle da vihana, beza abostol e Feiz hag e Vreiz. Ha war an dachenn zantel-se, en em ziskouezas mailh dreist. Dre gomz ha dre bluenn, ar Barz « Bleimor » a skignas, tro war-dro, e garantez evit e yez, stourm a reas feuls enep ar Vreiziz dilignezet a ra fae war ar brezoneg.

c) Kalloc'h, breizad penn kil ha troad, a ioa war eun dro gwella mignoun Bro-C'hall. Kasoni ruz en doa ouz ar c'hallaoued disakr, gwerzet d'an ifern evit heskina an Aotrou Krist hag e Iliz. Ar brezel, evitañ, a oa skourjez Doue war gein ar boblou satanazet. Met ar Frañz, dirazañ, a dalveze ouspenn an dornad framansoned a oa er penn anezi. Ha pa c'halvas ar Vro, skoazell he holl vugale d'he difenn enep ar soudarded kriz a sailhas warni, Kalloc'h a lakeas raktal e ano war roll he harperien kalonek ha leal; ha diredet, du-ze, war harzou ar reter, e c'helle kana :

« Dirak talbenn ar Frans, deuet eo va zro gedal.
« Me zo ar gedour bras en e-sav war ar c'hleuz.
« Ene Kornog, e zouar, e verc'hed hag e vleuñ,
« Holl gened ar bed eo a viran en noz-mañ.
« Me zo eur sterenn splann war dal Frañs o lugern... »

Gwechall goz, ar Gelted a save war an daez o c'hadourien kadarn. « Bleimor » dre vrogarantez en em savas war an talbenn risklus evel war eun daez a enor. Heñvel ouz Jezuz savet war beg menez Kalvar evit dasprena ar bed kablus, Yann-Per Kalloc'h ivez a skuilhas e wad divlamm evit peurwalc'hi pec'hejou Bro-C'hall kouezet en eur stad meurbet reuzeudik.

B) — Kenteliou evidomp.

E skol hor c'henvroad, deskomp teir garantez en unan : karomp ivez war eun dro, hon Doue, hor Bro, hor Yez.

I. — Diverkit ano Doue diwar hor Breiz, ha neuze, an touriou dantelezet a gouezo e poultrenn; ar baotred dizakramant a orjelle war hent an dever; ar merc'hed dizesket ganto hor c'hantikou ken dudius a zislonko kanaouennou divergont; hor mammou, ken seder en o feiz, dindan samm ar vuhez, hep o chapeled, a zibuno hep distag letaniou an daerou; ha ma ne c'hell mui hon tud oajet en em harpa war kroaziou an hent, e kouezint er pri gant bec'h o gwanderiou. Dismantrit labour hor Zent koz : Budoc, Kaourintin, Erwan, Gwenole, Herve, Pol, Tugdual, kant mil all; mirit mont da bardouna da Ger-Anna, d'ar Folgoad, da Rumengol, d'ar Porziou, da Lokronan, da Wir-Zikour, da Veg-ar-Raz, ha-me oar c'hoaz, ha neuze, hor Breiz dizakret ne vefe mui Breiz, met eun toull-ifern, hep levenez, karantez na kaerder. Doue, e gwirionez eo ene hor Bro, hag hor Zent eo frammin postek hor Breiz.

II. — Karit ivez hon Arvor. Kaeroc'h egeti n'eus ket a zindan an oabl. Redit drezi a-dreuz hag a-hed, hag e vezot souezet gant ar c'haerderiou hadet enni a vil-vern. Pep tra a zo eun dudi d'an daoulagad ha d'ar galon...

Met allaz ! Beteg re a Vreiziz a jom evel diseblant e touez kement a draou kaer. Mantrusoc'h c'hoaz ! Pennfollet gant giziou hudur, paotred ha merc'hed Breiz-Izel a zilez o gwiskamanchou dibar, o c'horollou broadel, a ra fae war gwirioù o ouenn hag a dro-kein da gement a rae kurunenn Arvorig !

III. — Karantez ar Yez ? Pegen birvidik edo e kalon « Bleimor » ! Savet en deus en he enor, eur mell pezh-labour : « War an daoulin ». Eveltañ, dougomp enor d'hor yez, hi eo mouez ar Vro, dreizi hepken e teu davedomp ar pinvidegezioù dastumet a-hed ar c'hantvejou gant hor c'hentadoù, hor Barzed hag hor Zent. Int o deus aozet ha temzet d'heñvel d'hor brezoneg hag e zeski d'ar vugale.

a) Ar gerent a vir ouz o bugale komz brezoneg a ra gaou outo ha dismegañs ouz o zud koz. Pep Breizad en deus gwir da c'houzout yez e vro, ha gallout a c'hell tamall tad ha mamm ha n'o deus ket teurvezet kelenn anezañ en e yez, da veza laeret digantañ herez pinvidika e gentadoù. Ar Vro dremenet hag ar vro da zont a vezo mut ha bouzar evit ar vugale divrezonekaet. Ar yez eo an alc'houez a zigor teizorioù ar vroadelezh, hi dreist-holl a zo merk hor ouenn. Neb na gomz ket brezoneg ne vezo morse eur gwir vreizad.

b) Ar mezusa a zo, eo Breiziz o kredi sevel o stad dre nac'h o yez evit raga- chat galleg saout. En desped d'e gaerder ha d'e dalvoudegezh, ar galleg n'eo nemet eur minorig e keñver yez koz ar Gelted. Ar c'hosa, hep mar ebet, eo ar pinvidika. An ezen kornek hepken a glever o randoni ez eo divarrek ar brezoneg

evit komz eus traoù a zo. Kasomp anezo da skol « Bleimor », ha gantañ e tes- kint eo eur c'hoari d'hor yez embann ar sonjezonou kaera, uhela ha kizidika a ziwan e spered mab-den.

c) Lorc'h, avât, eo a dlemp kaout o komz brezoneg. Yann-Ber Kalloc'h en deus stourmet, ha ni ivez a ranko ober muioc'h c'hoaz, evit ma vo digoret d'ar brezoneg holl skolioù Breiz-Izel. Hor gwir eo.

A l'exemple de notre compatriote groisillon, soyons apôtres de Dieu, de la Bretagne et de notre vieille langue.

1. — La Foi chrétienne est la charpente inébranlable de la nation bretonne, c'est elle qui a couvert notre sol de ces splendides clochers à jour, de ces bijoux que sont nos calvaires, de ces monastères : ruches de sainteté, forteresses de nos traditions sacrées, foyers de science et de civilisation. Expulser Dieu de Bretagne serait y anéantir les chefs-d'œuvre et les vertus.

2. — Tous les pays ont leurs charmes caractéristiques, le nôtre en possède un ensemble et une variété qui font l'ébahissement de ces milliers de touristes qui chaque année accourent pour jouir de la douceur de nos paysages, de l'air tonifiant de nos plages, de la splendeur et de la ferveur de nos pardons.

3. — Comme Calloc'h, soyons les champions de la langue celtique, l'une des plus antiques du monde et qui a enrichi ses voisines. Quoi qu'en disent ses détracteurs, qui d'ailleurs l'ignorent, elle est capable d'exprimer les sentiments les plus délicats du cœur, les acrobaties les plus audacieuses de l'imagination, les pensées les plus mystiques, les idées les plus sublimes, comme les découvertes les plus sensationnelles de la science moderne.

Honte à ces parents qui s'imaginent s'ennoblir en refusant à leurs enfants le droit imprescriptible qu'ils ont de connaître la langue sonore en même temps que charmante et exquise de leurs aïeux et par elle de communier plus intensément à leur sainteté et à leur génie. Nous ne sommes plus au temps maudit de notre enfance, où le crime de parler breton, en cour de récréation, était persécuté et puni par ce symbole odieux que notre rancœur surnommait : « la vache ».

La France, à laquelle la Bretagne s'est confiée en toute loyauté, moyennant le respect de ses aspirations les plus sacrées et les exigences légitimes de son régionalisme, la France, dis-je, semble revenir, enfin, de son sectarisme et de ses injustices, en daignant entr'ouvrir à notre langue la porte de ses écoles. Il nous faut, Bretons rassemblés ici sous la bannière de « Bleimor », ouvrir plus largement encore cette porte, afin que tous les enfants de notre race puissent s'exprimer dans le noble langage de leurs ancêtres. La France n'a rien à craindre de nos pacifiques et loyales revendications, la bienveillance et la confiance qu'elle accorderait à notre Province lui seraient remboursées au centuple par notre fidélité et notre amour. L'ingratitude n'est pas bretonne parce qu'elle n'est pas chrétienne.

Et pour réaliser le rêve de notre illustre compatriote J.-P. Calloc'h, qui, pour revigorer la littérature bretonne, rédigea les statuts de la ligue « Ar Brezonneg beo » (Le Breton vivant), aidez-nous par tous vos moyens, sans ménager celui de votre proverbiale générosité, pour que nous mettions entre les mains des enfants, des manuels scolaires, où avec le respect de cette France qui doit tant à l'héroïsme de nos marins, de nos soldats et de nos missionnaires, ils puissent avoir une meilleure connaissance de cette merveilleuse épopée écrite par nos aïeux fidèles à leur Bretagne et à Dieu.

A. S. I.

S. Richard, O.M.I.

EUN TAMM ISTOR

EVEL ma lavar hor c'hendirvi Kembreiz « penderfeunet » eo ganin hirio ober eun tamm istor hervez eul labour graet ganin dija eun toulladig bloavezioù 'zo.

O, eul lodenn eus an Istor eo na vez ket desket er skolioù ha koulskoude ez eo ken dedennus hag al lodennoù all. Estonet-bras e veer pa glever lavarout e oa dianav meur a blantenn d'hon tadoù-koz.

Ma veze debret eur bern kaol er Grenn-Amzer, ar piz-bras pe hariko na voe anavezet en Europa nemet er XVI^{vet} kantved. « Fao an Turki » a veze graet outo. Ar piz-bihan n'int anavezet mat ha debret gant kalz tud nemet abaoe ar XVII^{vet} kantved goude beza ket degemeret e palez Versailhez. Ebäz ar palez-se ne oa bet gwelet morse butun 'raok ma zeuas Yann Bart da welout Loeiz XIV gant e gorn-butun a reas c'hoarzin kement uhelidi al Lez. D'ar c'houlz-se ne veze gwelet o vutuni nemet ar vartoloded o doa kemeret ar c'hiz pe ar... si en Amerika. Paotr Sant-Malo, Jakez Karter (XVI^{vet} kantved) a zo bet an hini kenta o komz dre skrid diwar-benn ar « betun ». Eur blaz fall spontus en doa kavet warnañ, ha koulskoude, e derou ar Reveulzi, Mirabo a lavar ez eo deuet da veza ar gwella eus an tailhoù. Er XVI^{vet} kantved ivez e voe butunet ar wech kenta e Bro-Saoz gant Walter Raleigh, mignon bras ar Rouanez Elesbed (Elisabet). Pa welas e vevel anezañ o vutuni ez eas ermaez en eur huchal : « Ar mestr en deus studiet kement ken ez eo krog an tan en e benn ». Tapout a reas eur c'helorniad dour hag e tiskargas anezañ war penn ar butuner.

An ed-du na voe degaset da Vreiz nemet epad ar XVI^{vet} kantved. Eun afer mat a voe evit an debrerien krampoez. Ar gouerien a voe ret d'ezo ober nebeutoc'h a govadou fao evit terri o naon.

An Ao. de la Chalotais eo an hini en deus lakaet hada melchon e Breiz evit ar wech kenta er XVIII^{vet} kantved.

Hag an avalou-douar... Anezo eo an hini em eus c'hoant da gomz ar muia hirio.

(Da gendele'her.)



Ha n'eo ket gwir atao ?

« Quand je pense que je suis sorti bachelier du collège, capable d'écrire dix pages sur des tas de farceurs du genre d'Agamemnon et que je n'avais jamais entendu prononcer le nom de Nominœ. »

« La Bretagne »,

aux conférences du Souvenir, Novembre 1922, par A. Masseron.


...

« La France a le devoir d'accorder aux Bretons la pleine liberté de leur langue, gardienne de leurs traditions, par équité d'abord, par reconnaissance ensuite, enfin et surtout par souci de l'intérêt général et du véritable progrès. »

JEAN DES COGNETS.

BIHAN ME

Luskellerez



1.

An noz warnomp zo diskennet
An noz warnomp zo diskennet :
Ouz skeud al loar hag ar stered
Kousk va aelig !
Pegen koant ez out evelse,
Bihan me.

2.

Avel an aod a c'houez en nor
Avel an aod a c'houez en nor ;
Luskellet gant tranenn ar mor
Kousk va aelig :
Te vo estlammus da hunvre
Bihan me.

4.

Ez kichen-te me a chomo,
Ez kichen-te me a chomo,
Hag evelout me a gousko,
Kousk va aelig
Ken na vo deuet ar beure,
Bihan me.

3.

Evned ar mor o tarnijal,
Evned ar mor o tarnijal,
Pesked arc'hantek o neuial,
Kousk va aelig,
Bagou o vont ha dont prim tre !
Bihan me.

5.

Ha da ael-mat er Baradoz,
Ha da ael-mat er Baradoz,
Warnomp e skuilho e vennoz
Kousk va aelig.
Ha bennoz an Aotrou-Doue
Bihan me !

Evniñ Penn-Ar-C'hoad.

Kastell-Aodren, 26 Ebrel 1952.



Skeudenn an Tad Maner ha Mikael an Nobletz e chapel Roz-Avel e Kemper.

Mari-Amis Picard

(1599 - 1652)

MARTEZE, gwech pe wech, oc'h ober eun dro e iliz-veur Kastell-Paol ez oc'h bet souezet o welet, dirak aoter ar relegeier, eur vamm pe eur vamm-gez o teski bale d'eur c'hrouadur bihan war eur maen-bez sanket e leurenn an iliz. Tostaat hoc'h eus graet ha lennet ar c'homzou-mañ : MARIE AMICE PICARD DCD L AN 1652.

Netra muioc'h. Piou oa eta ar vaouez-se bet d'ezi an enor bras da veza beziat en iliz-veur ? Goulennet hon eus digant an ao. chaloni Kerbiriou, istorier bras Kastell rei d'eomp eun diverra eus buhez Mari Amis Picard ha setu amañ ar pezh en deus digaset d'eomp.

....

D'an 25 a viz Kerzu kenta e vo tri c'hant vloaz ma varvas e Kastell-Paol Mari Amis Picard. Er memes bloavezh ez oa maro daou zen a iliz hag o devoa kemeret preder gant ar grasou kaer he devoa resevet digant Doue hag o devoa kredet e santelezh he buhez : an ao. Trebodennic, viket vras hag ar beleg santel Mikael an Nobletz.

E miz Genver 1649, e renas an Tad Maner eur mision bras e Kastell ; galvet oa bet gant an ao. 'n Eskob de Rieux. Epad ar Mision ez eas da welet ar plac'h santel ken heskinet en he c'horf hag en he spered. N'oa ket ar wech kenta d'ezañ da gaout war e hent seurt darvoudou souezus ha burzudus. E penn kenta e labour a visioner, er bloavezh 1642 e reas anaoudegezh ivez, e Kemper, gant eur zervicherezh all da Zoue, Katarin Danielou, a ginnige he

foaniou evit ma vefe frouezus labour an Tad. Heñ e-unan zoken eo her rene war hent ar santelezh. Savet en deus eur skrid hir diwar-benn buhez poanias Katarin. Evel-se, daou ene eus an dibab, e Kerne hag e Leon, daou ene bet d'ezo ar grasou kaer a unaniezh gant Doue a jache dre o fedennou hag o foaniou, gliz an neñv war labour ar misioner.

Chom a ray an Tad eun nebeut amzer araok skriva buhez Mari-Amis : « Hir amzer 'zo, emezañ, d'an ao. 'n Eskob Pierre Le Neboux de la Brosse, eskob Leon eus 1671 da 1704 ; am eus c'hoant bras da zizelei d'an hini a zo azezet war gador Sant Paol Aorelian, eun teñzor kuzet en ho park... eun danvadez eus ho tropell... Doue a blij gantañ en em vataat eus tud devot hag izel evit embann e c'hloar ha trelli spered an dud desket ».

« Sellit 'ta, emezañ, ouz hoc'h eskopti, sellit penaos ez eus deuet gwellaenn, ennañ, penaos eo startaet ar feiz ; petra 'zo kaoz ! Doue en deus roet d'hoc'h eskopti daou ael da veilha warnañ ha da c'houzañv evitañ : Mikael an Nobletz ha Mari-Amis Picard, bet gantañ e skol ar zantelezh. »

....

Mari-Amis Picard a voe ganet e mereuri ar Gergamm, e parrez Guiklan, d'an 2 a viz C'houevrer 1599 ; badezet e voe er memes dervezh en iliz tosta, iliz-parrez Gwimilio. Ar yaouanka oa eus ar pemp krouadur o devoa bet Yann Picard hag Agata Mallegol, kristenien vat anezo, labourerien douar a renk izel.

D'an oad a 8 vloaz, ez eas ar verc'hig da zervija da di eun amezeg, Kristof Abgrall hag e voe lakaet da evesaat al loened. D'an oad a 13 vloaz e kollas he zad. Setu amañ ar pezh a lavaras d'e vugale ar c'hristen start-se araok mervel : « Taolit evez piou a zarempredoc'h. Tec'hit diouz an asambleou a vez danset enno. Ha goude ma vefec'h gwisket dister, gant lien pe stoup, plijout a reoc'h da Zoue ; stad a ray an dud ac'hanoc'h o veza m'ho pezo brud vat. « Gwelloc'h brud vat ha furnez eget plijadur ha danvez. » — « Pinvidigezh hep furnez, tra didalvez. »

Goude beza komzet evelse d'e holl vugale e talc'has Mari-Amis en e gichen hag e lavaras d'ezi e vefe ar groaz he lod war an douar, met ne vefe ar c'hroaziou-ze nemet ar merkou eus karantezh Doue en he c'heñver.

Al labourer-douar kristen-ze en devoa sonjet e paefe ker ar plac'hig ar vertuziou kristen a oa en he c'herz abaoe he bugaleaj. Eun devosion vras he devoa dreist-holl evit ar Werc'hez hag evit sant Yann Avielar a wele e pep lec'h o skeudenn kizellet er maen. Gwimilio en devoa dija e galvar kaer ; Gwiklan a oa o sevel e borched (an hini koz) ennañ eur bobl a zelveñnou ; kroaziou a oa hadet a-hed an heñchou. Leun a spered, Mari-Amis a intente buan ar pezh a lavared d'ezi ; anezi hec'h-unan ez ae war-eeun, evel war nij, daveat ar gwirioneziou dreist-natur. Ne ouie na lenn na skriva met he lijadur a oa selaou ar sarmonioù pe buhez ar zent, ar gwerchezed hag ar verzerien dreist-holl. Mat e oa da zerc'hel sonj ha kement a wele pe a gieve a jome garanet don en he spered. Eun dervezh, warlerc'h eur zarmon e voe ken fromet ma c'houlennas digant Doue ar c'hras da c'houzañv poaniou ar verzerien ha da jom gwerchezh.

Nann a lavaras da gement paotr yaouank, lod anezo pinvidik, a zeuas d'he goulenn da bried hag e chomas gant he mamm betek ma varvas houmañ ; 34 bloaz he devoa d'ar mare. Evit dont war zikour he mamm e teskas ar vicher a wiaderezh, rak Gwiklan a oa bro ar wiaderien.

Mont a rae da bardona ha da c'hounit induljansou d'ar Follgoad, da Lam-bader, da Zant-Fransez-Kuburien e-kichen Montroulez, da Zant-Yann-ar-Biz ha betek Santez-Anna-Wened. Eun dervezh, e-ser mont da bardona da Zantez Anna e kavas war he hent an Tad Quintin, eus kouent Dominikaned Montroulez. Ar relijius santel-ze, mignon da Vikael an Nobletz, a roas eur groaz d'ezi : « Va merc'h, emezañ, dalc'hit mat d'ar groaz-se, ezomm ho po anezi an nemorant eus ho puhez ».

E miz Eost 1635 e savas war he c'horf evit ar wech kenta, kleizennou ar verzerien. Er bloavezh-se, d'an 13 a viz Kerzu e voe kaset da Gastell, douget war eur c'hravaz-gwele d'an dimezell Koadaelezh. Aotrou Person Gwiklan, doktor eus ar Sorbon, ha chaloni eus iliz-veur Kastell, eo en devoa divizet kement-se war goulenn eun tad Minim, eus a Gastell. Hemañ a oa tad kofessor Mari-Amis hag en doa c'hoant he gwelet tostoc'h d'ezañ evit he ren

aesoc'h a ze war an hent disheñvel a gemere an ene santel evit mont da Zoue.

Kastell-Paol a oa d'an ampoent eur gêr zantel mar devoa ; aze eo e tremeno Mari-Amis ar peur-rest eus he buhez.

...

Ober a reas da genta-hec'h annez e ti eun intañvez devot, an Itron de Mordrain : goude-ze e voe kaset da gouent an Ursulinezed. Epad ar 17 vloaz ma vevas e Kastell « ne voe he buhez, eme an Tad Maner, nemet eun ariden-nad oberennou dreist nierz an den pe dost... burzudus eo en defe Doue miret d'ezi ar vuhez e-kreiz seurt tourmañchou », hep debri netra epad seiz vloaz nemet ar gomunion, hep kousket. Pemp gouli Hor Zalver a zigore war he c'horf da geñver gouliou ar Groaz hag en amzer ar Basion. Da geñver Gwener ar Groaz e ruilhe ar gwad war he zal ha war he c'horf ; gourvezet e chome evel stag ouz ar groaz war he gwele. Gouliou ar verzerien a zigore war he c'horf azalek ar gousper da geñver o gouliou. Kaout a rae d'ezi e vezed o trouc'ha he fenn diouti derc'hent gouel Sant Yann Vadezour, pe e veze dis-kroc'hennet derc'hent gouel Sant Bertele, lakaet war eur c'hrilh derc'hent gouel Sant Loran, gloazet tro war dro he gouzoug derc'hent gouel Santez Agnes. Derc'hent gouel Sant Bastian e voe gwelet war he c'horf seitek gouli evel graet gant birou ; ha derc'hent gouel Sant Visant ha Sant Anastaz Kribisennou war he dremm, aet don betek an askorn, evel ma vent bet graet gant kribinou houarn. Antronoz, da genver deiz ar gouel, e veze peurvuia leun a levenez, evel er mouez anezi hec'h-unan hag e veze frealzet ha kennerzet gant gwelet dirazi ar zent pe ar zeutezed-se. Evel-se eo e veze digollet eus an heskinerez a zeue d'ezi, emezi, eus a berz an drouk-spered.

Pa erruas e Kastell n'oa eskob ebet. An ao. 'n Eskob de Rieux a oa bet lamet e garg digantañ dre bolitikerez, d'an 31 a vez Mae 1635, war goulenn ar roue Loeiz XIII^e. Ar chaloniad a renas an eskopti betek ma voe anvet an eskob nevez, an ao. Robert Cupif, vikel vras eskopti Kemper.

Epad an amzer-ze e kavas mat ar chaloniad tenna Mari-Amis eus ar gouent hag he lakaat endro en eun ti eus kêr. Merc'hed devot evel an Itron de Kerzauzon, an dimezell Leon ha re all a intende outi. Met o veza ma ne vezent ket aketus da zont war he zro e voe karget da glevet outi eur plac'h yaouank Gabriela Hallegoet. Penn-skañv a blac'h, houmañ a lakeas da redek, diwar benn Mari-Amis, eur benn tam allou faos. Elouez ar veleien a voe lod a du gant ar plac'h santel, eod all a-enep ; meur a hini hag en o zouez an ao. Guilherm, a baouezas d'he difenn ; an ao. du Poulptry de Trebodennic avat a zavas ganti hag a roas d'he bod ha kement he devoa ezomm.

An eskob nevez a gemeras da vikel vras an ao. René du Louet, unan eus difennourien Mari-Amis ; met war gement a damallou a gleve war he c'hont, e lakeas ober eun enklask piz. Mat e troas an traou : Mari-Amis, emezañ, « he devoa doare da veza eur gristenez hag a blije kenañ da Zoue peogwir e touge en he c'horf merkou ar basion ». Rei a reas urz d'ar plac'h da jom mut war gement a zigouezfe ganti nemet hag he zad kofesour e vefe pe war urz he zad kofesour. Pell amzer oa bet renet hec'h ene gant an ao. Rolland de Poulpriet, aotrou a Feunteun-Speur, kaner bras ha dean ar chaloniad, desket bras war an doueoniezh ha war ar reiz. An ao. de Poulpriet eo a gargas an ao. de Trebodennic da skriva an holl draou souezus a zigouezfe e buhez Mari-Amis. Diwar ar skrido-ze eo e savo an Tad Maner buhez ar plac'h santel.

E diwez ar bloavezh 1648, an ao. 'n Eskob Cupif a voe anvet da eskob e Dol hag an ao. 'n Eskob de Rieux, restalet en e garg gant ar Pab Inosant X^e, a zeuas endro da eskob da Gastell goude beza kuitaet an eskopti epad 17 vloaz. Ne jomas ket pell avat ; mervel a dlee d'an 8 a viz Meurzh 1651. Drouk-prezegerien Mari-Amis a boanias gwasoc'h-gwaso evit klask gounit daveto an eskob nevez. Konta 'ra an Tad Maner edo eun dervez o léma gant an ao. 'n Eskob a lavaras eur person oa ar plac'h-ze eur vaouez divezet ; hervez-zañ edo er memes sonj Mikael an Nobletz a rae an ao. 'n Eskob eur zant gantañ. Daou viz goude e c'houlennas an Tad ouz ar misioner koz, e ser³e welet e Konk-Leon, petra 'zonje eus Mari-Amis : « Eur vaouez santel eo emezan ha Doue a blij gantan kaout sent a veur a batrom ».

Abaoe pell amzer ec'h anaveze Mikael tourmañchou an hini a vo anvet eur « roll beo a verzerien ». Eun dervez, wardro ar bloavezh 1636 e oa, hag

heñ en em dennet da veva e-unan penn a beg douar Sant-Vazé penn-ar-bed, e-kichen Konk, e kasas d'ar plac'h santel, dre zorn an dimezell de Fontenay, o vont da Gastell evit aferiou, diou villenn dastumet war an aod hag e kargas an dimezell da lavaret d'ezi : « Evel m'eo bet stoket-distoket ar bili-ze gant kounnar ar mor, evel-se ivez e vefe gwasket he buhez gant eur mor a dourmañchou ; met arabat e vefe d'ezi fallgaloni, sikouret e vefe gant Doue ».

D'an 19 a viz Kerzu 1652 ez eas he foaniou war wasaat spontus. Echu oa hec'h abadenn, mervel a eure da zeiz Nedeleg, diouz ar beure, leun he c'halon a beoc'h, kennerzet gant sakramanchou an Iliz ha bennoz hec'h eskob.

Beziet e voe gant gouel Sant Stefan en iliz-veur. Ne veze graet an enor-ze nemet d'an dud a Iliz a renk uhel. En hec'h iteramant e weljod an ao. 'n Eskob Henry de Laval de Boisdauplin, eskob Leon, an holl chaloniad ha personed, ar relijiuzed Karm ha Minim, beleien ar pareziou en em gavet e Kastell hag eur engroez a dud fidel diredet eus tro war dro. Hirio c'hoaz emañ he c'horf en helvelep lec'h dirak aoter ar releger. Hirio c'hoaz e teuer d'e feiz, dreist-holl ar mammou a zeu war he bez da zeski bale d'o bugale.


...

Pa vez echu da lenn buhez Mari-Amis Picard evel hini Katarin Danielou e chomer eun tammig trefuet e sell ouz traou ar bed-mañ. Setu diou vaouez, bet d'ezo testeniu anat eus karantez vras an ao. Doue, merkou burzudus war o c'horf, heskinet gant kroaziou deuet d'ezo a-berz ar bed hag a-berz tud devot zoken, krog ha krog gant enebourien dianav hag o vouz-c'hoarzin ouz ar boan, eürus-o tiwaska hag o c'houzañv evit ar bec'herien ; setu ar gudenn.

Met selaouomp tud o amzer. Obidou Mari-Amis a voe eur merk sklaer eus an doujans o devoe an dud evite. Ar « Gazette de France » — ha n'oa kazetenn all ebet nemete d'ar mare — a embannas war he c'hont eur pennad lenn a veuleudi. Araok he maro zoken tud desket — en o zouez Descartes — o devoa komzet diwar he fenn. N'edont ket war lec'h, gwir eo ; met testeniu tostoc'h hon eus. Daou abostol bras Breiz-Izel, ar beleg santel Dom Mikael an Nobletz hag an den eürus Julian Maner a gred start en he vertuziou. An Tad Quintin, ar memes tra. An Tad Bauny, prezeger brudet, an Tad Binet, penn rannvroad ar Jezuisied, an Tad Bernard, bet oc'h heulia an Tad Maner en e visionou hag abostol bras an Normandi, an Tad Budes — deuet da veza Sant Yann Eudes — a zeuas da welet ar plac'h santel da Gastell : holl o deus lavaret edo merk Doue war an ene-ze.

Ha setu petra skriv an ao. René du Louet d'an deiz kenta a viz Eost 1667. Epad 18 vloaz, da genta evel vikel vras Leon, ha goudeze evel eskob Kemper, e studias hag e lakeas studia buhez burzudus Mari-Amis. Hervez an enklaskou-ze ez eo splann evitañ e renas bepred eur vuhez a izelegez, a c'hlanded hag a garantez, e voe dalc'hmat doujus da aliou he zad-kofesotir. Setu perak e kav d'ezañ ez eus er vaouez-se « merkou a zantelez start, hep ehan ha dibaot etouez an darn-vuia eus an dud. « Evit gouzout hiroc'h diwar he fenn e ro ali da lenn skrido an ao. de Trebodennic lakaet etre daouarn an Tad Julian Maner, fiziañs gantañ e tenno Doue e c'hloar anezo. »

Louis Kerbiriou, chaloni.



Bro Japon etre daou du

DA geñver gouelioù Pask ar bloaz mañ, hon Tad Santel ar Pab a gase eur gemennadurez da Japoniz, e oa meulet enni techou mat pobl Japon hag an niver bras a dud eus ar vro deuet d'ar gwir relijion abaoe fin ar brezel.

Re all, estreget hon Tad Santel, a zo gounezet ha dedennet o spered gant perziou talvoudus ar vroad-se, pell pell du-hont, e tu ar sav-heol. An Amerikaned a zalc'he ar vro abaoe fin ar brezel o deus sinet eun emgleo-peoc'h ampletus kenañ gant ar Japon, e miz Gwengolo 1951. Ar penn-jeneral Stalin, diouz e du, en deus kaset, da zeiz kenta ar bloaz, reketou flour da Japoniz, a-berz poblou an U.R.S.S.

Ha setu Bro Japon, moudounet gant Stadou Unanet an Amerik ha paotred an U.R.S.S., ha sachet etre daou, seiz bloaz goude ma voe friket eul lodenn vras eus kêr Hiroshima, gant ar vombezenn diskejenn genta, seiz vloaz goude ma rankas, toutek ha lostek, goulenn ar peoc'h digant an daou Stad galloudus-se. Petra 'ta zo da c'hortoz, ken prisiüs, a-berz eur vro trec'het mik, n'eus ket gwall bell c'hoaz ? Petra ?

— Plas ar Japon e-barz ar bed, demdost d'ar C'hore ha d'ar Siberi, he foblans stank, o vont war greski atao : eno eman an dalc'h, eno eman an tenzor a garfe tapout evitan, an daou Stad bras a zo etrezo kement a enebiez, gwasoc'h marteze en Azi eget en Europ.



E fin miz Eost 1945, pa zilestras ar soudarded amerikan kenta, er Japon, ar vro-se, daoust d'ezhi beza goulennet ar peoc'h, a oa c'hoaz galloudus. Enep ar vombezenn diskejenn avat, ne oa difenn ebet d'ar poent-se. Dalc'het e oa c'hoaz gant ar Japon al lodenn vrasa eus Bro-Chin — Indo-Chin, en he fezh, hag eun toullad inizi, e kreiz ar Mor Habask ; an darn vuia eus uzinou ar vro a oa c'hoaz en o sav hag a valee atao, prest da ober marc'hadourez marc'had-mat spontus, kerkenet ha ma vefe echu ar brezel. Impalaer ar vro, Hiro Hito, a oa sellet outan evel pa vije eun doue ha ne oa ket a dermen d'e c'halloud. Paotred an Amerik avat ne felle ket d'ezo e chomfe ken galloudus-se ar vro hag he Mestr. Graet a doa o sonj da freuza an uzinou brezel ha da lakaat ar re all da vont en-dro, goustadik, evit ma c'hellfent gwerza aesoc'h o marc'hadourez o unan. O menoz oa izelaat galloud an impalaer ha rei d'ar vro eur gouarnamant diazezet war ar bobl. Ha kregi a rejont gant o labour.

E penn kenta ar bloaz war-lerc'h, ar Mikado a rank anzañ, dirak e bobl, ne oa ket eun doue, evel ma kreded betek neuze, met eun den evel ar re all. Diskleriet e voe ive ne oa mui ar Shinto, relijion hag e veze azeulet enni ar Mikado hag ar vro, ar relijion ofisiel. Votadegoù a voe graet dre ar penn da benn hag azalek neuze ar vinistred o devoe da respont eus o labour dirak kannaded ar bobl. Divobilizet e oa bet an arme, evel just, ha kaset ar soudarded vicher da glask o chans. Laouen an Amerikaned neuze : deuet e oa ar Japon da veza eur republik dre an diavaez.

Freuzet pe zilezet e voe maread a uzinou ha diskaret trustou brasa ar vro. Savet e voe sindikajoù micherourien, el lec'h ma ne oa hini ebet araok ar brezel. Ret e oa avat beva ar vicherourien kêr, lakaet dilabour gant freuzidigez al labouradegoù. Prenet e voe neuze gant ar gouarnamant an douaroù dilabour pe re ar perc'henned brasa ha rannet e lodennoù bihan da veza gwerzet marc'hat mat. Kement-se ne oa ket a-walc'h ha ret e voe d'an Amerikaned beva diwar o c'houst eun bern Japoniz. E kerz eur bloavezh 300 milion a zollaroù a voe dispignet hepken evit kas bevans, dilhad ha louzeier d'ezo.

Gwall ger e koust d'omp beza trec'het ar Japoniz, a sonje paotred an Amerik, a ranke paca tailhoù kreñvoc'h kreñva.

Epad ma tispigne an Amerikaned dollaroù da vev e-leiz a Japoniz, ar Rusianed i o doa adkemeret an inizi Kouril ha Sakhalin e-tal Siberi ar reter. War drenkaat ez ae an traoù etrezo hag an Amerikaned, ken en Europ hag en Asi. Kreñvoc'h kreñva e teue ar gomunisted da veza er Chin daoust d'an harp bet roet gant an Amerikaned da c'hoularnamant leal ar vro. Ma teuas renerien ar Stadou Unanet da soñjal e oa gwall zispignus derc'hel da vev maread Japoniz, war zigarez e vije danjerus lakaat da vale en-dro an uzinou bet freuzet pe zistrollet. Ma teuas en o sonj e vije ampletusoc'h lezel Bro Japon d'en em adsevel, e pep doare, hag ispisial, e keñver an ijinerezh, d'he lakaat da veza en dro eur vroad c'halloudus, ma c'hellfe ar Stadou Unanet en em harpa start warni, dirak ar gomunisted o vont war araok muioc'h mui en Asi. Ha setu ar pezh a voe graet azalek deizioù kenta ar bloaz 1948.

Adsavet e voe an uzinou a oa bet diskaret, lakaet da vale en dro ar re a oa bet dilezet. Postet e voe arc'hant amerikan en ijinerezhioù japanat. Ouspenn se e kenver politikerezh e voe lezet muioc'h a frankiz d'ar Japon da zarempredi ar broioù all.

Kregi a reas gouarnamant ar Stadou Unanet da studia peseurt stumm e vefe mat rei d'an emgleo-peoc'h gant ar Japon. Amerikaned a-bouez a zisklerias da renerien Bro Japon sonj o gouarnamant diwar-benn sina ar peoc'h buan a-walc'h, ha zoken (arabat hel lavaret re fraez diouzu) ober eun emgleo a vignoniaj etre an diou vro. A nebeudou, dre ma z'ae an amzer e-biou, e voe renket artikloù an emgleo-peoc'h. Daoust da himor fall ar Rusianed.

Etre daou ar soudarded amerikan a zeue da veza souploc'h en o doareoù ; mistri ar vro e oant bet, dont a raent da veza mignon d'ar Japoniz.

Pa darzas brezel ar C'hore, e kreiz ar bloaz 1950, e komprenas dreist holl pennadurezhioù an Arme amerikan pegen prisiüs e oa ar Japon evito e kement a zelle ouz pourvei da ezommou o arme. Kreñvoc'h kreñva c'hoaz e teuas ar c'hoant sina ar peoc'h, an abreta ar gwella, hag esa da c'houde ober eur vro vignon eus ar Japon.

E San Fransisko, e miz Gwengolo 1951, e voe sinet ar peoc'h. Bro Japon, deuet bihanoc'h eget araok ar brezel, a gawe a nevez he frankiz hag an esper da zont da veza galloudus adarre, eun deiz. Ar Rusianed avat hag o c'henseurted eus an Asi a nac'has sina.



Hag abaoe ? Abaoe eman ar soudarded amerikan er vro, atao, abalamour da vrezel Kore. Sevel a ra an tiez nevez a vil vern, er c'hêrioù hanter zismantret. An uzinoù a ya en-dro gwasoc'h eget biskoaz. Gwerzet, ha gwerzet aes meurbet, e vez ar varc'hadourez, dre ma z'int marc'had mat, en holl vroioù tro-war-dro : Indo-Chin, Aostrali, Malezi. Gouarnamant ar vro, goude beza kavet e frankiz en dro, a oar diskouez ez eo libr hag, en eur fom tostik ouz politikerezh an Amerikaned, a ra da genta holl politikerezh ar vro e unan. Goulenn a rit diganeomp en em glevet ganeoc'h paotred an Amerik ? Marteze a-walc'h, met gwall dost omp ouz broioù komunist an Asi ; daoust ha gouest ez oc'h d'hon difenn outo ? Daoust ha c'houi eo a breno hor marc'hadourez. Gwerzet, araok ar brezel, da Vro Chin, breman m'eo sarret krenn ar vro-se ouzomp ?

Hag, e gwirionez, sachet eo ar Japon etre daou du : en em glevout penn da benn gant an Amerikaned hag o mignoned da ziouall ouz ar gomunisted, petramant en em drei davet Bro Chin hag U.R.S.S., prest o diou, da brenañ an holl varc'hadurezhioù a zeu er-mez eus uzinou nevez ar Japon, adsavet gant sikour an Amerik. Arabat ankounac'haat, e kenver ar poent se, ez eus breman, er Japon, 83 milion a dud, o vev en eur gorread douar bihanoc'h eget Bro C'hall hag ez eus, bep bloaz, eur milion Japoniz muioc'h, ken stank eo ar rugale er vro se. Boued d'an holl ha frankiz leun, setu aze, dioc'h a seblant, c'hoant brasa gouarnamant Japon.

Ar gomunisted i ivez o deus esaet tapout krog er Japon ha deut int a-benn d'en em sila, er sindikajou labourerien, bet savet gant sikour an Amerikaned hag e touez an dud yaouank war o studi. Tousmac'h ha freuz a zo bet ganto d'an deiz kenta a viz Mae warlene, ha meur a wech abaoe. Er c'heit se, eürusamant, e weler muioc'h mui a Japoniz o tilezel o fals-kredennoù hag oc'h antreal er relijion katolik.

Ra blijo gant an Aotrou Doue rei furnez ha nerz kalon a-walc'h d'ar Japoniz da zibab hent ar reiz hag ar peoc'h evit o brasa mad hag hini holl poblou ar Reter (ar sav-heol) pella.

Ar reder mor.



PINVIDIGEZHIOU BREIZ

(Al legumajou)

Daoust ha petra 'bouez a legumajou a zo bet kaset eus a Gastell-Paol ha tro-war-dro davet marc'hajou Bro-C'hall hag ar broiou diavaez ?

Evit ar *brikoli* gant ar bloavezh 1952 : 90.000 tonell o deus kuitaet ar vro dre hent-houarn, dre an hent-bras pe dre vor. War ar gont-se, 35.000 tonell davet ar broiou diavaez : 13.700 tonell war Vreiz-Veur, 3.700 war ar Belgig hag al Luksambour, 16.000 war an Alamagn, 2.400 war ar Suis, 200 war an Izel-Vroioù (Holand), 30 war ar Sveden.

Rabad a zo er bloaz-mañ gant ar c'hemwerz etre-vroadel war Vreiz-Veur (13.700 tonell e-lec'h 23.000 tonell warlene) dre 'n abeg m'eo bet serret ouzomp re abred marc'hajou ar vro-ze, met gounid a zo war an Alamagn (16.000 tonell e-lec'h 9.500 warlene).

Ar *patatez-abred* : 3.128 tonell war Vreiz-Veur (1.850 warlene, 1.250 er bloavezh 1950). Perak ar gounid-ze ? netra nemet dre 'n abeg m'eo deuet abretoc'h ar patatez ; rak, kaer a zo bet ober, marc'hajou Breiz-Veur a zo bet serret ouzomp d'an 31 a viz Mae evel bep bloaz.

Porz-mor Rozko. Er bloaz-man 9.850 tonell ognon (5.300 gant ar Johniget, 4.550 tonell evit ar varc'hadourien Breiz-Veurriad. Kalz eo ; perak ? diwar goust m'eo bet fall ar bloavezh ognon e Breiz-Veur, en Izel-Vroioù hag er Spagn.

KORN AL LIZIRI

Setu amañ war-lerc'h eul lizer bet resevet gant an Ao. Seite digant ar skrivagner Jakez Konan aet da vev eul bloavezh 'zo er C'hanada.

Montreal, d'an 29 a viz Gouere 1952.

AOTROU SEITE GER,

A-benn ma tegouezo al lizer-mañ ganeoc'h, e vezo ar Bleun-Brug en e gaera e Landreger. Heli a ran ma vezo ar brava hini bet biskoaz e Breiz-Izel bete vremañ. Kompren a ran pegement a labour hoc'h eus bet oc'h aoza pep tra a-benn ar gouel, c'houi hag ho ken labourerien. Pedi a ran Sent Vreiz d'ho skoazella ma taolo ar Bleun-Brug frouez puilh, ha ma viot digollet eus ar boan ho pezo kemeret.

Diouz hon tu, setu m'emaomp o paouez lida gouel Santez Anna. Mat-tre eo tremenet an traou. An Aotrou Léger, arc'heskob Montreal, a oa ar « pardon ». Hagaratoc'h egetañ e-koñver ar Vretoned n'heller ket beza hag eur gouel kaer eo fellet d'ezañ ober d'eomp dre eureuji e-unan araok an oferenn-bred — dirak an aoter savet e-diavaez iliz Sainte-Anne de Belle-Vue a benn ar pardon — daou zen yaouank eus ar c'hlec'h keltiek (gwisket e giz ar vro).

Meur a Vreizad, ugent pe tregont vloaz 'zo er C'hanada, a ouele o welout eur seurt arvest war zouar an Amerik.

An Aotrou Lannig, aluzenner ar Vretoned (genidik eus a Bondi), a reas eur gaer a brezegenn diwar Santez Anna, mam-m-goz ar Vretoned. Echui a reas e sarmon e brezoneg, dirak Kanadiz bamet.

Meur a gant e oamp da greisteiz en eur sal bras-meurbet miret evidomp gant tud ar vro : ar re-mañ a reas d'imp ar gwella degemer. Enoret, emezo, e oant gant al luf ar roemp da ouel o farrez. Fellout a ra d'ezo e rafemp bep bloaz kemend-all.

Goude kreisteiz e rejomp eun abaden-koroll ha kan (e brezoneg) a lakaas an holl da dridall gant al levnezh. Klozet e voe ar gouel diouz an noz, dre eur procesion bras hag eun tan arvest dirak « Lenn an Doue Venez ».

Diaes eo evit an hini a zo chomet e Breiz, kompren pegen pouezus eo ar seurt bodadegoù ha pegen frouezus ez int.

Gant pardon Santez Anna hon eus bet degouez da ober anaoudegezh gant kenvroiz amañ hag a-hont er vro. Kalz anezo bremañ a fell d'ezo donet d'hor c'hevredigezh. Re all, zoken, a gomz eus kuitaat al lec'h m'emaint bremañ evit klask labour tostoc'h ouzimp.

Kredi a ran e c'hallimp ober labour vat amañ. E sell emañ da ober skol vrezonek adalek miz Here. Er c'hlec'h keltiek e vo pleustret diwar vremañ war an dañsou hag ar c'han (na petra 'ta), an istor hag ar yez. Tud yaouank entanet (paotred) a zo amañ, met, evel e lec'h all, ar renerien eo a vank.

Gwelloc'h Vreiziz eo chomet an divroidi a vev er broiou saonek eget el lodenn c'hallek-mañ eus ar C'hanada. Ar re nevez deuet, an darn vuia anezo dreist-holl, a zo brezonegerien : ne zalc'hint avat d'a yez nemet ma c'hellont kroui tiegezhioù breizat, ha mar kavont eur greizenn vreiziek tost d'ezo.

Esae a raimp sevel boumañ : dister eo hon nerz avat, evit bremañ. Setu perak ec'h, aspedomp ar re a vefe e-sell da zont amañ d'hen rei da c'houzout d'imp, ma 'n em strollimp da labourat a-gevret. Ha pep tra a c'heller da ober amañ, rak, evel m'am eus lavaret c'hoaz, bro ar Frankiz rik ez eo.

Bezit dinec'h, aotrou Seite ger, n'omp ket o vont da goll hor broadelezh nag hor yez en douar ec'hon-mañ : mar fell d'an Aotrou Doue ha da Zent Vreiz hon harpa, derc'hel start da herez hon tud eo a raimp.

A-benn eun nebeut deizioù e vo studiet reolennadur ar Bleun-Brug gant strollad-ren hor c'hevredigezh. Spi am eus e valeo dre ar memes hent ganeoc'h pe zoken e vezo eur gevrenn estren eus ar Bleun-Brug.

Pe oad eo an tamm koad-man ?

Evit-se, kemerit eur « c'honter » Geiger a vez implijet evit muzulia an nerz atomek. (Da skouer, goude distrij Hiroshima gant ar vombezenn atomek). Seul vui a « dennou » a ra ar c'honter-mañ, seul vrasoc'h eo al lodenn « atomek » en traou a zo en e gichen. Ma dostait anezañ ouz eun tammig bihan radiom e klevot 'vel eur vindrailherez o tenna !

Roet ez eus bet da dud boazet da ober gant ar muzulier-se, eun tamm koad, o tont eus eur bez koz eus Bro-Ejipt. Hervez an istorourien e oa an tamm koad-se 4.575 vloaz. Ha paotred ar Geiger, hep gouzout netra eus kement-se, o deus lavaret : « 4.600 vloaz eo ». Ar pezh a zo just a-walc'h 'vel respont.

Penaos o deus gallet gouzout kement-se ? Setu. Er c'hoad beo ez eus, o tont eus an aer, eun doare « glaou atomek », graet anezañ « karbon 14 ». Pa varv ar c'hoad, nebeut-ha-nebeut, ez a da goll ar c'harbon 14. Nebeut-ha-nebeut 'ta e koll ar c'hoad e nerz atomek, ha seul gosoc'h ar c'hoad maro, seul nebeutoc'h a nerz atomek ennañ, ha seul vihanoc'h niver an tennou a zeu er-maez eus ar c'honter Geiger.

Pa vez beo ar wezenn, pe nevez-drouc'het, e klevet er c'honter 12 tenn dre vunutenn. Pa vo an tamm koad 5.700 vloaz ne vo mui klevet nemet 6 tenn ; pa vo 11.400 vloaz, tri denn hepken...

Evel-se ivez e c'heller « lakaat oad » d'an eskern, tud pe loened, a gaver (pe a zo bet kavet) kuzet er menezioù pe diindan zouar. Kemend-all evit ar paperioù koz.

Gant ar « Geiger » e vo dizoloet evel-se kalz a draoù eus an amzer dremenet.

K. Riou.



EUL LEZENN NEVEZ DIWAR-BENN AR " BISTRO "

Journal Officiel an 2 a viz Gouere 1952 en deus embannet eul lezenn bet votet didrouz gant ar Gambr, war goulenn an Ao.Ao. Cayeux ha Taillade. Setu :

« Difennet eo... degemer (en tavarbioù) minored dindan 16 vloaz ma n'emañ ket ganto o zad, pe o mamm, pe o gward (tuteur), pe unan bennak all, ouspenn 18 vloaz, karget da evezia anezo. »

Sur, n'eo ket en tavarbioù emañ plas ar vugale, memes m'emañ d'o heul o'herent. Met petra lavarout ouz ar gerent-se a ginnig evajou alkoolek d'o bugale, zoken bihan-tre ! Hag ouz an tadou hag ar mammou a zo lore'h enno peogwir o mab, pe o merc'h, a zo bet mezo da geñver e Bask kenta ? Klevit ar pezh a gonte eur vaouez da Glara Candiani (*Témoignage Chrétien*, 29-2-52, p. 6) : « Breizadez ouñ... Eva 'rae va c'herent... C'hoarzin a raent pa welent ac'hanoun mezo-dall d'am dek vloaz. Kendalc'het am eus ; dimezi am eus graet. Va gwaz en deus klasket mirout ouzin da eva. Poan gollet ; kerkoulz klask lakaat harz da red ar Sên. En em guzat a raen da eva, kas a raen gwinn ganin em sac'h. Betek pevar litrad am eus lonket en eun devez... »

Gant piou eman ar wirionez ?

PE gant ar re a welomp hirio ; ker stank, oc'h ober fae war ar brezoneg, hag a gav brao lavaret, evit golo o leziregezh da zeski hor yez, he deus ar yez-se graet he amzer, ha n'eo mui mat nemet da deurel e toull ar c'hoztavaraioù...

Pe gant ar re a deu o mouezioù betek ennomp, eus an tu all d'ar bez, hag a lakomp aman war-lerc'h unan bennak eus o c'homzoù...

En e lizer koraiz 1846, an ao. 'n Eskob *Graveran*, les-anvet an Eskob Gwenn, a skrive :

« Gwelet a reomp gant eul levenez wirion e tale'hit mat d'ho kizioù kristen, d'ho prezoneg. Hoc'h eskob a oar peseurt liamm a zo etre yez eur bobl hag e gredennou, etre e c'hizioù hag e zoare beva, etre e voazamanchou hag e berzioù mat... »

E tro ar memes mare, *Hon Tad Santel ar Pab Pi IX* a lavare d'an aotrou *Lezeleuc*, vikel vras Kemper : « Dalc'hit d'ho prezoneg evel da vab ho lagad, rak keit ha ma vezo gwaskedet ho feiz gantan, ar feiz-se a vezo gwaskedet mat... »

En e brezegenn, d'an 13 a viz Du 1924 (Discours de réception à l'Académie française) an Ao. *Camille Jullian* a lavare :

« Faire mourir une langue, mais c'est pécher contre la vie sociale. Une langue nous apporte les idées et les sentiments de nos ancêtres, elle nous conserve les nôtres, elle les répète aux êtres qui viennent de nous. Elle est le lien moral par lequel le crépuscule de la journée humaine qui finit se rattache à l'aurore de celle qui commence... »

E Bleun Brug Douarnenez, d'ar 4 a viz Gwengolo 1924, an ao. 'n Eskob *Duparc*, o komz diwar-benn Dom Mikael an Noblet a lavare :

« Ne laissez pas périr l'âme bretonne. Elle a coûté si cher à nos saints. »

Dom Michel vous dirait : Aimez de plus en plus la Bretagne. Aimez-la avec sagesse en union avec la France selon les vues de la Providence. Ne séparons pas ce que Dieu a uni. Nourrissez vos âmes de son histoire, toujours douloureuse, souvent glorieuse.

Attachez-vous à sa langue qui devient par vos efforts chaque jour plus pure et plus riche. Gardez-la vivante dans vos familles, vivante dans vos églises, vivante dans vos écoles... »

E Bleun Brug Plougastel, d'ar 24 a viz Eost 1936, an ao. 'n Eskob *Trehieu* a lavare :

« Ha c'houi, Breiziz Goelo ha Treger ha Leon ha Kerne ha Gwened, difennit hon yez, yez ar Varzed, yez ar Zent, ha komzit, kanit, lennit, deskit, harpit, strewit ar brezoneg... Ha Breiz a vevo... »

Gant piou emañ ar wirionez ?

Kredi a reomp eo gant an dud a spered-se, ha gant eleiz a re all, a vije aes renka aman o c'homzoù.

N'eus Breiz ebet hep ar feiz, Breiz ebet kennebeut hep ar brezoneg.

Ha setu perak ne c'hellomp ket miret da lavaret e fazi ar gerent, ha war an digarez mat da zeski muioc'h a c'halleg d'o bugale, a lez yez karet o zadou da vervel war bleg o muzelloù.

Fazia a ra ive ar prezegeñien hag ar skrivagnerien, ha war an digarez plijout da hiniennou eus ar re a zo ouz o selaou, pe ouz o lenn, a zebant kaout mez oc'h ober implij eus yez ar Vro.


Evit ar pezh a zell ouz ar brezoneg ha gizioù fur hor Breiz, e kredomp eo gwir, penn da benn, ar pezh en deus skrivet eun den gouiziekl bras : « An den, emezan, n'eo ket den a-walc'h anezan e-unan ; evit beza en e gaer en deus ezomm eus an amzer dremenet, eus skoazell an dud a zo bet en e raok ; neuze hepken, ma chom stag ouz e ouenn, stag ouz e dud koz e vezo eun den a enor, eun den a spered ha goude ma vefe distet da welet... »

Hag abalamour da se ive e fell d'eomp kenderc'hel gant hon ero hag e c'hou-lennomp diganeoc'h, lennerien, hon harpa da vont war araok.

L. B.

Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan. — Tirage : 1.800 exemplaires.

QUIMPER IMP. CORNOUAILLAISE



Eur chapelig didrous e maeziou Breiz-Izel.